

# FRAGILITE AN DUD YAOUANC

## Var eun ton rigolo

Ni boa eur hoguic y'ouanc oa duman guenem-ni  
Oa commanset do gana, mes brema **na ra** mui  
Eun nozvez goude e goan, o tont eur zonj ne ben  
Me a renk mont an noz man, var digare pourmen.

Me renk ober eur baie, eun droyat var ar mez  
Da glask e merh Periva, digant an intanvez  
Me guir ou hanvet coguic, gant oll dud ar vro ma  
Me garfe caout eur bolez, vit nem zivertissa.

Pa meus tapet an hano, a goguik vit partaj  
Vo ret din caouet parrez, da gomans ma menaj  
Perin merh an intanvez, hounez a zo jam grad  
Kannerez a danserez, brillant e daou lagat.

Bonsoir dehu intanvez, setu me deut exprez  
Da glask ho merh Perina, da hanter tiegez  
Rag keit a ma vemp yaouanc, or bo contamant  
A plijedu assembles ep chagrin na tourmant.

Ma merh me zo abredic eur blavez hoaz  
Mar de contaal ar buguel, me na ranket a gaz  
Kousket eo en o guele er pen draon an ti  
Monet a ran de havet, da houlen diganti.

Arsa ma merch emazi, na din me levered  
A houi zo contant paouric, de gavet eur pried  
Berroh kaffet an amzer, bremen epad an anv.  
A toma doh o kuele, goude pa zeui ar goanv.

O ya va mamm emezi, certain me zo contant  
Demens a greiz ma halon, da gaout eur pot yaouank  
Mar dsi caner a danser, ac eur pot delicat  
Neuze a meus esperans, d'ober tiegez mad.

Neuze ar pot yaouank man, a zo jaoüs ha guie  
Ac a zistroaz d'ar gaer, hed an hend neur gane  
Penos eta yan goguic, te zo bet o vale  
Eun tam mout divezat, o hanons domg au de.

Neuze zistroat ouziu, gant eun air da hoarzin  
Mar de guir on me koguic, houi so eur louarn fin  
Houi pef a vadelez da vont bremen ractal  
Da anenz ma dimezi; betec ar presbital.

Ar hoarz var ma muzellou, pa non ket vit miret  
Ya va mignon emezan, me rei ze na reket  
Monet a ran evidoh, betec ar presbital  
Rac merh an intanvez, evidoh ne ket fal.

Bonjour doh autrou person, me a zo deut gant prez  
Da hout a houi zimefe, eur hoc ac eur bolez  
Pere s deus desir bras, da veat unisset  
Eun tamic a zo dija, o deus en em cheazet.

Neuze a respontas d'in, ive neur vous hoarzin  
Deus aman abarz zal, kemer eur bane guin  
Eroët ezout bepred, eun tamic de keyver  
A teus klevet jamais, ve dimezet ar yer.

Eskuzit aotrou person, ma meus drouc parlantet  
Malheur eo dandud yaouanc, pere zo leshanvet  
A re a barlanton doh, a zo daou zen yaouanc  
A zezir be unisset, vel diou galon gontant

Ar re a barlanton doh, zo mal a fumelen  
A zezir bea staguet, gant ar memez chaden  
Unan ane triveh yla, an hini all pemzec  
Zo pell zo bras en hirvout, hortoz be dimezet.

Ma et dar guer ma mignon, lar de dont dant illiz  
A me o interrojo, var dern a hatekiz  
Pa ergoulet digante, a na ouient netra  
Demeus ar sakramanchou, a re brinsipalla.

Filt dar ger bugale, evit eur bloa pe daou  
Da hortoz ma po desket, dern ar zakramanchou  
Neuze zavas e ziou skoa, me a gred a zonje  
Ean druez eo emezan, dimezi bugale.

Neuze a zeuont dar guer, o daou en eur ouela  
Ret a vo demp emezo, donet da studia  
Ret a vo demp studia, couls an de ac an noz  
Mat quefomp ket re neve, ni ze-ko a re goz.

Tri pe bevar miz goude, a ya an intanvez,  
da gaout an aotrou person, da lard an tol evez  
Rac va merh zo languissant, eun tammic zo dija  
Seul vui avans e kienvel, ya beped var vella.

Seiu an aotrou person, dezi neus lavaret  
Lavarit dezo dont hoas, ac a vont dimezet  
Houi a fad daou zen yaouanc, a lavar ar person  
Ar oar nem gonvertissa, ep mont d'ar mission.

Ar memez tra ez int bet, dimeed ac eureujet  
Gras da vea eüreus, keit a vont var er bed  
Bonheur a zeziromp de, keit a vont er bed ma  
A goude pa vont maro, er gloar de jouissa.

FIN

CORENTIN BOUARD.

Tous droits réservés :

**GUILLERMIC Yves.**